

344

## Chanson Nevez.

(390, suite)

Var ton : Ah ! il m'en souviendra, larira.

Selaouit ur chanson blesant pini zo grêt da ur plac'h,  
 Gement parros zo en Treguer eo bet partout e clasq goas.  
 Ha tout e lavaront dezi ne ra sur nemet coll he foan,  
 Hac e ranco mont e-unan da gousquet goude he c'hoan.

Evit commañç henvel goaset, e Sant Vazze Montroulez,  
 E zeus potriet c'hséc, delicat, ne zellont qet outi drez,  
 Ha potriet vras Sant Malani ne dint qet grêt evit he fri,  
 Plouyan, Garlan ha Plouezoc'h, ha Plougânon a lar fœi.

(391)

En Guimec, pe en Locqirec, e Lanneur e rai he zol,  
 Mar he deve ur zervicher, e vo a escopti Dol.  
 Tremez a ranco Pontmenou, eviti da verza plac'h fin,  
 Potriet Plégat he ranvoys da Dremel ha da Blestin.

En Tredrès hac en Tredudal emañ 'r voaset en o ès,  
 Dreist al Leo-drès e ranco lamet da vont da Lomiquel an Très,  
 En Plouillo, e Loguiry e velo meur a hini,  
 E Ploulec'h ha e Lannion e deus bet un troatad fri.

A Blouber, a Verlaouene e ro he zoc'h dei ar voaset,  
 Bulien, Caouen, Caouennec, santez Perron, Plouanec,  
 Treleverec, Pleveur-Bodou, Servel ha tizo Coatreven,  
 Trebeurden, Santez-Gemperven, p'e quelont a dro o fen.

Prozelen ha Ros-Trizinic, Lanviliin ha Penvelan,  
 E lavar dei an dud yaouanq na gavo bigen unan,  
 A Lannezec'h hac a Langoat ne devezo sur nemet gad,  
 A Vinichi, a Landreguer ne devezo qet qêlou mad.

(392)

Plevian, Plouescant, Tredarzec, Plouguiel, coste Landreguer,

Ne gafe qet ur zerricher : èt int d'ar c'hân d'ar Brezel,  
A Bouldourant, a Zant-Salver, a baros Prezal-Landres,  
A Bloudaniel e teu 'r voaset d'e ranvoji da Bontres.

A Sant-Gili, a Dregonec, eus ar baros a Blouec,  
Treo Benien, t'eo ar Squiriec, Ploueni ha Roc'h-Bertet,  
Godilin ha Lande-Baeron, Tregones haec Erasi,  
A C'houanac'h ha a Bleuri hac a Roc'h-tremontouri.

A Goad-ascorn, a Donquedec, a Dregrom, a baros Prat,  
Bolean, Landevan, Guezeneec, Plouaret ar c'hos-Varc'hac,  
A Lanvelec e teu 'r voaset da gredi ne deo qet fur,  
Hac o deus-hi bet ranvoyet da Blounerin, da Blufur.

(393) Ha Plegadis en un instant hac e c'hass prest d'ar Ponthou,  
Ha Ponthouis ractal buan e c'hass da Lanneanou,  
En Plouigno potriet vaillant hac a zo ardañt a fin,  
E c'hassas prest da Blougonven, Botsorhel ha Guerlisquin.

Ar'hano e rancs bale buan ha liger a droat,  
Dre 'r Vousterri e partias d'ar baros a Vourvriac;  
En Boulbriac an dud yaouanc na gavent qet bras he forpant,  
Ma voe casset da Sant-Thecla ha d'ar quèr vras a Bengamp.

Ar reman voa en eur fachet oüs he guelec deut eus ar quèr,  
Hac o deus-hi bet ranvoyet dreist ar Pont a Lomiguel;  
E Lomiguel, e Luzivili e rejont derzi dalandrel,  
Ma redas dre Goat Malani varzu Plouegat ar C'hastel.

En Loqono, e Plouneve, en Benac'h hac e Camlez,  
E Sant-Ithrop, peurit-ar Roc'h, hac ebaros paros Rospes,  
E qement corn e deus furchet hac en faros a Dregastel,  
Mes caer he devoa, dre valeur na gave qet tud fidel.

(394) E Lannerin, e Montalot, en Trogueri, en Hengoat,  
E Plemeur-Gautier, Lanmodez, e Plouec, e Louergat,  
E Lezardres, e Loquivy, e Plougras, e Plounerin,  
E Plumet, Sant-Clet, Sant-Runan n'int qet quèt erit he min.

En Begar, Gemper-Guezeneec, en Graef, en Gurussuel,  
En Plouezal, en Brelidy, en Duolt, Camihuel,

346

En Tregono, en Pedernec, e Sqific ha Sant Loranç,  
E Sant Agathon, en Pabu, ne deveus qet bet a chang.

En Ploumoguer, e Logenvel, e Treglamus, e Mael,  
E Plougouver, e Bringolo, e Sant Yan, e Carnoel,  
E Lanvodoc, e Sant-Fever, e Gervien, e Sant Fiec,  
E Sant Adrien, e Magoar e zeo bet torchet he bec.

E Pont-Melvez, Callac, Senven, e Plourac'h ha Pleguien,  
E Plusquellec, e Lohuec, Plouha ha Pestivien,  
E Botoha, e Sant Conan, e Calanher, er Merzer,  
E Gergrist hac e Lanvelon ne blige qet dei tud qer.

E Lanriven, en Pol, er Moustèr, e Gergest hac er faouet,  
E Mael Gerahes, Trebrivan, e Rostren, e Treguidet,  
E Santez Triphina, e Plevin, e Pludual, e Lanloup,  
E Brehat, Penpoul hac ar Vur, e deus bet ur zac'had stoup. (395)

En Glomel, Tregnau, Tremerin, Gerity, Pevrit ar C'hoad,  
En Pleguien, Lannibert, Sant Guen, e Gomenec'h, e Laniscat,  
En Plehedel, Ploubalanec, en Plouezec ha Plouez,  
En Plourivo, e Gervin e deus fontet gant ar vez.

Bet eo ive en Irias, e Sant Couel, e Perret  
E Plalan, Corle, Sant Mayeux, e Plusquilien ha Lescouet,  
E Gouarec, e Millionec, en Corel, hac a bartout,  
E zeo bet ar plac'hic qez-mâ casset gant e en he rout.

Ceta fin da Escopti Treguer, hep na deus caret he c'hoant,  
Mes ive re difficult eo, anzavit, merc'het yaouanq;  
C'hoas ha ma cafe en Gerne, en Leon pe en Guenet,  
Marteze e ve contantoc'h ha joausoc'h he spenet.

Mes lezomp ar rederez, mâ d'ober beach inutil,  
Rac bigen na gavo ur goas, neus fors pequeument eo subtil;  
Neo qet, me a ell en assur, o reded calz eu[?] a vroyou,  
E r'er peuvruia, ha mignonet, ar quella an afferou. (396)

C'houi, Merc'het fur, a bep contre a vo bepret desiret,  
Ho yaouanqis hac ho furnez a ray ma voc'h d'erepret;  
Demp-ni eo, oll botret yaouanq da vonet prest[?] d'ho pisita;

347

Certen, an oll, evel don-me, er grayo gant calz a joa.

Merc'het, ha c'houi potret yaouaneq, ornamant a Vreiz-Izel,  
Bezit bepret e peb amzer vertuzus, gwyê ha fidel;  
Ha mar canit ar zonic-mâ, lavarit a greis ho calon:  
Me vo, evel he c'homposer, atao fidel d'am mignon.

Gent eget echui va zon e carfen dont d'inspira  
Da <sup>in</sup> yaouaneqis peb paros ameus bet hanvet amâ  
Dont da brena peb a gopi, evit ma allo ar c'haner  
Eva ur banne da yec'het potret ha merc'het Treguer.

(397) Gouscoude ne ven get fached e teufe oll Leonis  
Gercouls ha yaouaneqis Guenet, assambles gant Gernervis  
Da brena ive ar chanson, evit he diski bars er quër,  
Ha da gana a greis calon: Vivat yaouaneqis Treguer!

(Vol. III, pages 390-397.)  
26 str. numérotées.